

ADRIEN DE CARNÉ

BARZ AN ARVOR



891.
682



Kristen ha Breizad da virviken

SAIK AR PAOTR FIN

C'hoari farsuz enn eun Arvest



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTEL — 4

1912

PESIOU C'HOARI

Savet gant Adrien de Carné (Barz an Arvor)

Breiz karet , pezh-c'hoari e tri arvest (kurunet gant Kevredigez broaduz Breiz). . .	0 fr. 60
Ar ialc'had aour , c'hoari farsuz enn eun arvest	0 35
Ar Mabig Jezuz , myster enn eun arvest.	0 35
Kristof ar C'hrenv , myster kristen enn eun arvest	} 0 75
An aotrou Flammik , c'hoari farsuz e daou arvest	
Tarsiziuz , myster kristen enn eun arvest.	0 45
Saïk ar paotr fin , c'hoari farsuz enn eun arvest	0 40



E Brest, e ti an aotrou DERRIEN, ru Siam, hag e ti an aotrou TOURMEN, ru an ti-kear. — E Kemper, e ti an aotrou SALAUN, ru Kereon.

ARGUMENT

Le meunier Laouik, poursuivi pour dettes, est à la veille du jour où ses meubles seront vendus. Il éconduit adroitement ses créanciers, et, pour se procurer de l'argent, il a recours à l'esprit rusé de Saïk, son garçon de moulin. Celui-ci trouve sans peine l'homme qu'il faut. C'est Guilcher, vieux médecin très riche et à moitié fou, qui a juré de ne jamais soigner que des maladies extraordinaires. Saïk en invente une absolument étonnante et extorque mille francs à Guilcher. Il pousse même la fourberie jusqu'à faire semblant d'être mort. Au moment où tout se découvre, Laouik revient, les poches gonflées d'argent. Par une de ces chances qu'on voit dans les comédies, il vient d'hériter de sa grand-tante. Il paie tous ses créanciers, Guilcher compris, et tire la conclusion de l'aventure. Il faut payer ses dettes, sous peine d'être réduit à des expédients dans lesquels la probité court les plus grands dangers (1).

(1) Les scènes XXI à XXV de cette comédie sont imitées, en partie, d'une farce anglaise : *le Mort sous le scellé*.

C'HOARIERIEN

LAOUIK, miliner.

JAKEZ, e vab.

SAÏK, e vevel, louarn fin.

BONGORS, kiger, teo ha lard.

KERANGAL, kemener, denik koz, eun tammik tort.

GWENN, boulonjer.

GUILCHER, medisin, pinvidik braz.

KRAPER, urcher koz.

*An dra ma a dremen e Breiz-Izel, e milin
Laouik. — Eun daol fall. — Kadoriou. —
Eur c'hoz tamm gwele.*



KENTA DIVIZ

LAOUIK, e unan, azezet e treid e wele, o kounta e wenneien.

Unan, daou, tri, pevar, pemp real. Unan, daou, tri gwennek. Enn holl, eiz gwennek war-n-ugent. *O furcha e gweled e ialc'h.* Ia da, n'euz ken nemet eiz gwennek, war-n-ugent, enn holl. *O c'hoarzin.* Ha ! Iann batatezenn ma z'oun ! Ha va godellou ! N'em boa sonj ebed euz va godellou. *Furcha a ra e godellou e jiletan hag e gweled e voned ; sevel a ra hag e furch enn e c'houriz. Liardou a zon ebarz ; goude beza o c'hemeret, Laouik a azez adarre, en eur c'hoarzin.* Ha, ha ha ha ! Eiz real ; unan, daou, tri, pevar, pemp, c'huec'h, seiz gwennek. An dra ze a ra, enn holl, gant ar pezh am euz em ialc'hik... *O sonjal.* C'houezek real !... N'eo ket... An dra ze a ra, enn holl, eur skoued ha pemzek gwennek ; ker gwir ha ma z'oun badezet, n'oun ket re binvidik, feiz ! gant an danvez ma. Jakez ! Jakez !

II DIVIZ

LAOUIK, JAKEZ

JAKEZ

Va gervel ho peuz great, va zad ?

LAOUIK

Ia, Jakez. Traou braz am euz da lavaret d'id.

JAKEZ

Ha me ive, va zad. Great eo gan-eomp ; great eo evit mad. Paket omp. En em gavet oun, eur pennad zo, gant an aotrou Krapar, an urcher koz ; lavaret en deuz d'in e vezo lekeat gwerz war-

n-omp, warc'hoaz vintin, p'eo gwir e tleomp kalz a wenneien d'eur maread tud. *O wela.* Ha ni a ielo d'ar prizoun goude, sur, hi, hi, hi, hi !

LAOUIK, *o c'hoapaat euz e vab, hag oc'h ober neuz da wela ive.*

Ha ni a ielo d'ar prizoun goude, sur, hi, hi, hi, hi ! Ro peoc'h ta, genaouek, eleac'h gwela evel eur plac'hik. Abarz ma z'in d'ar prizoun, me, e vezo kavet eun neiz logod e skouarn eur c'haz. Eun tamm brao a arc'hant hor beuz ezomm ; mad. Ni a vezo digouezet arc'hant gan-eomp kent an noz.

JAKEZ

Ha penaoz ?

LAOUIK

Bez dinec'h. Kalz troiou a bep seurt am euz em zac'h. Ha da genta, kea da gerc'hat paperiou ar varc'hadourien, ma welimp mad, hon daou, pegement e tleomp d'an dud se.

JAKEZ

Peleac'h ema ar paperiou ze ?

LAOUIK

E tireten an daol. *Jakez a ia da gerc'hat.*

JAKEZ

Setu i, va zad.

LAOUIK, *o sellet oc'h paperiou*

N'euz ket kalz avad. N'euz ken nemet tri. *O lenn.* Dleet d'an aotrou Kerangal, kemener, daou vragez hag eur jiletan, tri ugent lur. Mad ; amzer zo evit hennez. Dleet d'an aotrou Gwenn, boulonjer, daou ugent lur ha pevarzek gwennek. Dleet d'an aotrou Bongors, kiger, pemp lur hag hanter kant.

JAKEZ

Red eo d'eomp paea ar c'higer da genta. Hennez eo, va zad, en deuz goulennet digant ar barner lakaat gwerz war-n-omp.

LAOUIK, *drouk enn han*

Hennez eo ! hennez eo ! tan kurun ! Hennez eo ! Laouen oun, avad, laouen braz o klevet kement-se. Ha ha ! hennez a fell d'ez-han lakaat gwerz war an dud vad ? Me a lakaio da zansal evit mad ar c'higer reuzeudik, ar c'higer milliget se. Ra vo torret e c'houzouk gant-han ! Kea ta ! kiger teo, sac'had kik, fouldren kiger an diaoul ! *Ar c'higer a zeu, eur vaz deo gant-han. Laouik a denn e voned hag a ia d'her saludi.*

III DIVIZ

LAOUIK, JAKEZ, BONGORS

LAOUIK, *flour e vouez*

Sell ta, sell ta ! gwir eo, feiz ! an aotrou Bongors ar c'higer eo ! va mignoun ker an aotrou Bongors eo ! Ha penaoz ema ar bed gan-ehoc'h, aotrou Bongors ? Hag an itroun Bongors, ker koant, ken deread ? Mont a ra mad ? Pell zo abaoue n'em euz gwelet anez-hi. Hag ho pugaleigou, ker kaer, ker...

BONGORS, *rust e vouez*

Awalc'h ! Na petra eo d'e-hoc'h iec'het va greg ha va bugale ? Me a fell d'in arc'hant. *O skei taoliou baz war an daol.* Me a fell d'in arc'hant dioc'htu. Klevet a rit ? *O skei adarre.* Me a fell d'in va gwenneien.

LAOUIK

Just avad. Va mab ha me, n'euz ket pell, a gomze ac'hanoc'h. Ha n'eo ket gwir, Jakez ?

JAKEZ

Eo, eo, va zad.

LAOUIK

Me a lavare d'ez-han : Poent eo, va mab, poent eo d'eomp paea hon dle d'hor mignoun ker, an aotrou Bongors.

BONGORS *oc'h astenn e zourn*

Mad ; pemp lur hag hanter kant eo.

LAOUIK, *oc'h ober neuz da veza laouen*

Gwir ? pemp lur hag hanter kant ha netra ken ! Me a zonje d'in e tlienn d'e-hoc'h an hanter muioc'h ! Pemp lur hag hanter kant ! N'eo netra, ha warc'hoaz vintin e paein ac'hanoc'h betek an diner diveza.

BONGORS

A bell zo e kanit ar ganaouen ze d'in. *A vouez hueloc'h.* Selaouit mad, evit ar weach diveza. Ma n'em bezo ket arc'hant digan-ehoc'h warc'hoaz vintin, lakaat a rin gwerz war-n-oc'h, evel m'am euz lavaret.

LAOUIK

Warc'hoaz vintin, sur, ha gwella zo, hirio, marteze diouc'h ar pardaez, rak o c'hortoz arc'hant dleet d'in emaoun.

BONGORS

Gwerz war-n-oc'h, warc'hoaz, gwerz war-n-oc'h ! Taolit evez ! *Bongors a ia kuit.*

IV DIVIZ

LAOUIK, JAKEZ

LAOUIK

Gwerz war-n-oc'h ! Gwerz war-n-oc'h. Klevet ec'h euz, Jakez, klevet ec'h euz an den lard se ?

Ha da c'hortoz, n'em euz ket ar gwennek kenta. Red eo d'eomp, Jakez, kaout arc'hant araok an noz, kousto pe gousto. Peleac'h ema Saik ar mevel ? Petra a ra hen ?

JAKEZ

Netra ; kousket eo, dilabour ma z'eo.

LAOUIK

Mad. Kea d'her dihuna, ha lavar d'ez-han dont aman dioc'htu. Hennez zo eul louarn euz ar re fina ; hennez en em droio enn tu pe du hag a ziluio hor c'hudenn evit ar gwella.

JAKEZ

Mont a ran, va zad. *Jakez a ia kuit*

V DIVIZ

LAOUIK, *e unan*

Nag a boan o deuz an dud vad o c'hounid o buez paour ! N'euz forz ; me am euz kaset kuit ar c'higer ; dinec'h oun gant-han betek warc'hoaz, da vihana. Mez hennez en deuz lavaret d'an holl e lakafe gwerz war-n-oun, hag ar re all, oc'h her c'hlevet, a zeuio ive, marteze, d'am zrubuilha. Ar boulonjer, ma tlean d'ez-han daou ugent lur, a c'houlennno digan-en, sur, e liardou ; ha Kerangal ive, ar c'hemener, ma tlean d'ez-han tri ugent lur. Peleac'h e kavin me, kement all a arc'hant ?

VI DIVIZ

LAOUIK, KERANGAL

KERANGAL

Chans vad d'id, Laouik.

LAOUIK

Ha d'id ive, Kerangal. Mont a ra mad atao, gan-ez, Kerangal ? Hag an itroun Kerangal ? Mad ez a ar bed gant-hi ?

KERANGAL

N'oun ket dimezet.

LAOUIK

Gwir ? Pegen diot oun me ! N'em boa sonj ebed euz a gement-se. Mar ec'h euz c'hoant da gaout eur c'huzul fur, dimez, Kerangal, dimez buhan. Me zo diou weach intanv, mes ne jomin ket pell va unan evelse. C'hoant awalc'h am euz da gemeret eun deirved maouez ; ia Kerangal, ia, ha te zeuio d'ar friko.

KERANGAL

Me zo deuet da c'houlenn ouz-id...

LAOUIK

Te zo mad dreist an holl da zimezi. Te zo eun tamm bouzar da skouarn ; gwell a ze. Er c'hiz se ne glevi ket da hini goz o krial, o c'hlabouza hed an deiz penn da benn.

KERANGAL

Me zo deuet da c'houlenn...

LAOUIK

Da zillad eureud, Kerangal, ne goustint ket ker d'id. Te zo kemener, eur c'hemenner fin, eur c'hemenner lemm e spered. Da zillad eureud a vezo great evit ar gwella gan-ez, hag evit netra, kouls lavaret. Ne ket ta ?

KERANGAL

Me zo deuet...

LAOUIK

Me zo da vignoun a greiz va c'haloun, Kerangal.

Oc'h ober neuz da zellet war zu ar meaz, hag o krial a bouez penn. Sell ! Ha ! gwaz a ze d'in me ! Siouaz d'in. Va fenn-moc'h brava kouezet er ster. Buhan ! buhan ! ema o vont da veuzi ! Va brava penn-moc'h ! Laouik a ia kuit d'an daou lamm.

VII DIVIZ

KERANGAL, *e unan, kounnar enn han*

Ra viot beuzet ho taou, té ha da benn-moc'h, den trubard, den fall. Me a lakaio an archerien da c'haloupat war da lerc'h, pez didalvez.

VIII DIVIZ

KERANGAL, JAKEZ

JAKEZ

Petra a livirit, aotrou Kerangal ? Drouk ho peuz oc'h unan bennag ?

KERANGAL

Leac'h am euz da gaout ive ta. Oc'h da dad eo am euz drouk ha drouk braz.

JAKEZ

Perak ta ? Peleac'h ema va zad ?

KERANGAL

Ha me a oar me ? Da denna euz an dour e benn-moc'h brava, kouezet ebarz, emez-han.

JAKEZ

E benn-moc'h brava, mil diaoul ! Pell braz zo hor beuz gwerzet hor penn-moc'h diveza.

KERANGAL

N'euz forz. Eun hanter-heur zo m'emaoun o c'houlenn digant da dad an arc'hant dleet d'in.

JAKEZ

Ha petra en deuz respountet d'e-hoc'h ?

KERANGAL

Dimez, Kerangal, dimez, ha diotachou all evelse.

JAKEZ

Bezit dinec'h neat, aotrou Kerangal. Va zad, meur a weach, a vez pounner e benn, dreist holl pa vez eun tamin laouen gant ar banneou.

Warc'hoaz vintin, aotrou Kerangal, e paeimp ar pezh zo dleet d'e-hoc'h.

KERANGAL

Ne c'hellin ket dont warc'hoaz. An aotrou Guilcher, medisin, en deuz lavaret d'in mont enn e di, warc'hoaz da vintin, da gerc'hat eur bern gwiskamanchou koz.

JAKEZ

Sellit ta ! Rei a raio d'e hoc'h eur bern koz dillajou. Perak ta ?

KERANGAL

Perak ? Abalamour ma ne fell ket d'ez-han miret e druillou. N'oun ket pinvidik braz. Vad a rafe d'in kaout ha gwerza an holl draou koz se.

JAKEZ

Klevet a ran. Mad ; ma ne c'hellit ket dont warc'hoaz, aotrou Kerangal, deuit hirio, etro an abardaez. Arc'hant ho pezo. *Laouik a zeu. Chom a ra e gweled an teatr.*

KERANGAL

Bennoz Doue. Dont a rin. *Kerangal a ia kuit.*

IX DIVIZ

JAKEZ, LAOUIK

LAOUIK

Eat eo kuit. Ne ket re abred.

JAKEZ

Ia va zad, mes kent an noz e teuio enn dro da c'houlenn e arc'hant.

LAOUIK, o c'hoarzin

Amzer zo, betek an noz. Lavaret em euz d'id mont da zihuna Saik.

JAKEZ

Her dihunet am euz. Saik ! Saik !

X DIVIZ

JAKEZ, LAOUIK, SAÏK

SAÏK

Labour ho peuz da rei d'in ?

LAOUIK

Ia da, eul labour euz ar re vrasa. N'em euz ket a arc'hant, Saik.

SAÏK

M'oarvad. C'huec'h miz zo n'oun ket bet paeet digan-ehoc'h.

LAOUIK

Paeet e vezi, va moutik, paeet e vezi. Mes red eo d'id rei eur skoazell vad d'eomp. Ni a dle arc'hant leiz an daouarn.

SAÏK

Da biou ?

LAOUIK

Da genta da Vongors, ar c'higer. Hennez a lakaio gwerz war-n-omp, hep truez ebed, ma ne baeomp ket warc'hoaz vintin.

SAÏK

Ha da biou c'hoaz e tleit ?

LAOUIK

D'ar boulonjer, mez hennez n'en deuz goulennet tra bete vremen.

SAÏK

Ha da biou c'hoaz e tleit ?

LAOUIK

Da Gerangal, ar c'hemenner. Hennez zo deuet.

JAKEZ

Ia, hennez zo deuet, hag e teuio adarre, ha zoken kentoc'h eget Bongors. Hennez a zeuio enn dro, da gerc'hat e arc'hant, hirio, etro an abardaez. Lavaret em boa d'ez-han dont warc'hoaz, evel Bongors. Mes ne c'hell ket, emez-han, rak traou en devezo da gemeret warc'hoaz e ti an aotrou Guilcher, ar medisin.

SAÏK

E ti an aotrou Guilcher ? Setu avad eun den hag a ve goest da bresta d'e-hoc'h eun tamm brao a arc'hant. Anaoud a ran mad an den ze, me, o veza bet e vevel epad tri bloaz. Hennez zo pinvidik mor, hag en deuz, atao, tri pe bevar mil lur, gant-han, enn e c'hodell.

LAOUIK

Petra ta, petra ta ? o parea an dud klanv eo en deuz gounezet kement all a arc'hant ?

SAÏK

N'eo ket. E dad eo en deuz lezet d'ez-han, war e

lerc'h, eun danvez ha n'o deuz ket o far. Ugent vloaz zo m'ema o choum an aotrou Guilcher er vro ma, ha n'eo ket bet nemet eur weach, o welet eur c'hlanvour.

JAKEZ

Perak ? Den n'en deuz biskoaz her galvet ?

SAÏK

Ar c'hontrol eo ; goulennet eo bet digant-han, gant n'ousped den, ma teufe d'o farea ; en deuz respountet atao hag atao : Nan ! Nan !

LAOUIK

Diaoula medisin !

SAÏK

Hennez ne fell d'ez-han parea nemet klenvejou dispar, klenvejou souezuz, klenvejou dreist natur. Evel m'am euz lavaret d'e-hoc'h, ez eaz, eur weach hepken, da di eur c'hlanvour koz ha paour. An den klanv se, o veza mezo, pe foll eun tammik, en devoa lounket eul loa houarn ken hir hag ar vreac'h. Guilcher a c'hoantaaz stard da gaout eul loa er c'hiz se, bet epad eur pennad brâo a amzer e stomok eun den. Prena a reaz anezhi digant an hini koz, evit daou c'hant lur. E kemeraz eur gountell lemm, e tigoraz korf ar paour keaz hag e tennaz al loa er meaz.

JAKEZ

Ha petra a c'hoarvezaz gant an denik koz ?

SAÏK

Mervel a reaz raktal, lazet mik. Mez an heritourien a zigouezaz gant-o an daou c'hant lur. Laouik zo red d'ez-han ober neuz da gaout eur c'hlenved bennag nevez ha mantruz ; gervel a raimp Guilcher da zont hag e kavimp eun tu pe du da denna eur zac'had mad a wenneien digant han.

LAOUÏK, *spountet*

Ia da, mes n'em euz c'hoant ebed da lounka eul
loa houarn ken hir hag ar vreat'h.

SAÏK

Ne vezo ket red ken nebeut. List da ober. Me a
gavo eun dro bennag da zont a benn euz va zaol.
Mes, dreist holl, grit penn da benn ar pezh a livirin
d'e-hoc'h, ha livirit atao evel-d'oun me.

LAOUÏK

Eaz eo.

SAÏK

Mad. Gwiskomp Laouik e doare eun den klanv.

JAKEZ

Ne ket diez. Aman ez euz eur goz ballenn varc'h
hag eur boned noz. *Jakez a ro an traou.*

SAÏK

Brao, brao. Lekeomp an truillou ze enn dro d'ez-
han. *Lakaat a ra ar ballenn enn dro d'ez-han gant
eur gordenn, hag ar boned war e benn. E tirollont
da c'hoarzin o zri.*

JAKEZ

Pegen farsuz eo va zad evelse !

SAÏK

Eur c'hlanvour distinget eo, na petra ta ?
*C'hoarzin a reont adarre. Ha breman, Jakez, kea
buhan da lavaret d'an aotrou Guilcher dont aman.*

JAKEZ

Mont a ran dioc'htu. *Jakez a ia kuit.*

XI DIVIZ

SAÏK, LAOUÏK

SAÏK

Da c'hortoz, labouromp hon daou, ma welimp
ha c'houi a raio mad micher eun den klanv paket
gant-han eur c'hlenved spountuz kenan.

LAOUÏK

Pe seurt klenved ?

SAÏK

Klenved eun den karget e benn hag e gof a
boaniou. *Laouik a aze hag en em laka da grial,
da hirvoudi, ha d'en em zifreta.*

LAOUÏK

Ahi ! va fenn ! Ahi ! va c'hof ! Nag a boan am
euz ! Ha, ha ! Hi, hi ! Taoliou morzol em fenn !
Aiou, ah, aiou ! Truez ! truez ! Kroget eo an tan
em-c'hreiz ! Diskargit eur banne d'in ta ! Ahi !
ahi !

SAÏK

Brao kenan, brao ! *C'hoarzin a reont. Gwenn a
zeu, eur vazik gant-han. Sell ta ! piou eo hennez ?*

XII DIVIZ

SAÏK, LAOUÏK, GWENN

LAOUÏK, *oc'h ober an hini klanv*

Ha c'houi eo, aotrou Gwenn ? C'hoant am euz e
ve ho iec'het gwelloc'h eget va hini me. *Oc'h
hirvoudi goestad. Han, han, han !*

GWENN

Feiz ! doare eun den gwall glanv en deuz.

LAOUIK, o krial

Ahi ! va fenn ! *Gant eur vouez klemmuz.* Me a felle d'in mont hirio da baea d'e-hoc'h ar bara mad hoc'h euz gwerzet d'in ; ia, d'ho paea, d'ho pa... pa..., d'ho pa... pa... Mes ne c'hell... ne c'hellan ket kerzet... kerzet...

GWENN, *gant truez*

Mad eo, mad eo, Laouik ; ne dleit d'in nemet daou ugent lur ha pevarzek gwennek. Amzer zo ; divezatoc'h e paeot.

LAOUIK, *klemmuz e vouez*

Siouaz d'in ! me hag a felle d'in ho paea hirio ! Ahi ! ahi !

SAÏK, *klemmuz e vouez ive*

N'ho pezo ket pell da c'hedal, aotrou Gwenn. O c'hortoz ar medisin emaomp, o veza ma z'eo ker klanv va mestr paour. Bremaik dioc'htu e varvo, o lezel war-e-lerc'h peadra d'ho paea, ha kalz muioc'h zoken.

LAOUIK

Hi, hi, hi !

GWENN

N'oun ket nec'het war gement se ; tamm ebed. Kenavo, ha iec'het gwelloc'h. *Gwenn a ia kuit o lezel hep sonj, e vaz war an daol.*

XIII DIVIZ

SAÏK, LAOUIK

SAÏK

Eun all kaset kuit ive. Nosvez vad d'ez-han.

LAOUIK, *laouen braz*

Te zo eul louarn fin, Saïk. Ni zo sioul breman

evit eur pennad mad. C'hoarzomp eun tamm ta, Saïk ; deuz ta da c'hoari eun tamm ganen. *Ec'h en em lekeont da zansal dourn a dourn an eil gant egile, en eur gana :*

Me eo Yannik a Benprat } 2 w.
Eur c'hanfart a zoare }
Poent zo bet, c'houi oar ervad
E karien va banne !

Gwenn a zeu enn dro goestad da gerc'hat e vaz hag a jom e gweled an teatr.

N'eo ket brao, Jakou } 2 w.
Ober re gorfajou (1). }

Laouik ha Saïk a well Gwenn neuze. Chom a reont hep flach.

XIV DIVIZ

SAÏK, LAOUIK, GWENN

GWENN, *souezet*

Sell ta, sell ta ! an den klanv ze, feiz ! ne ket ken tost d'ar maro hag e lavared.

SAÏK

Eo, eo, siouaz ! Pa vez kroget enn-han e glenved evelse, e spered a dro a bep tu, hag ober e rankan e lavariou, n'euz forz petra e vent, c'hoarzin, dansal, krial, kana, ha me oar me ? Anez e ven me marteze lazet gant-han. *O sellet oc'h Laouik.* Hola ! hola ! aoun am euz. Sellit out-han ta ! E zaoulagad a lugern ; hola ! hola !

Laouik oc'h ober an hini foll, hag oc'h ober neuz da glash a bep tu ; Va fuzil ! Va fuzil a zaou denn ! Va c'hleze ! Va fenn-baz ! Peleac'h eme va fenn-baz ? Redek a ra war zu ar Gwenn. Gwenn a ia kuit buhan.

(1) Pardoun Yan-Vraz, *savet gant P. Tréouré.*

XV DIVIZ

SAÏK, LAOUÏK

LAOUÏK, *oc'h azeza hag o sec'ha e dal.*

Mil kurun an diaoul ! Me zo skuiz maro gant ar jabadao ze.

SAÏK

Skuiz maro ! ne ket echu koulskoude, an abadenn. Red eo d'eomp derc'hel ar c'hoari-gaer ze eun nebeudik amzer c'hoaz. *O sellet war zu ar meaz.* Diwallit ; azezit buhan. Setu an aotrou Guilcher o tont. Diwallit mad.

XVI DIVIZ

SAÏK, LAOUÏK *azezet*, GUILCHER

GUILCHER, *a vouez huel.*

Peleac'h ema an hini klanv ?

SAÏK

Setu hen, aotrou Guilcher.

GUILCHER

Ha pe seurt klenved a zo kroget enn-han ? Mar d'eo an dersienn, ar vosenn, ar gor, ar rouign, an drouk-mean, an drouk Sant Anton pe draouigou all er c'hiz se, ne fell ket d'in e barea. Ne fell d'in me parea nemet klenvejou dibaot, klenvejou iskiz ha ne weler ket anez-o bemdez, klenvejou goest da rei eur vrud dispar d'am han.

SAÏK

E glenved a zo dibaot evel ma c'houlennit, aotrou medisin. Hennez a fell d'ez-han mont da Baris raktal da werza da zaou vedisin brudet e gorf paour goude e varo. Ne c'hellomp ket e zerc'hel sioul, Jakez na me.

LAOUÏK, *e benn stouet war e galoun*

Den reuzeudik ma z'oun ! re glanv oun. O vont da vervel emañ.

GUILCHER

Ha perak ta an daou vedisin ze o deuz roet d'ez-han o ger da brena e gorf goude e varo ?

SAÏK

Evit kaout ar gwir da drouc'ha poull e galoun, ma z'euz ebarz, ni a oar, traou burzuduz meurbed.

GUILCHER, *souezet*

Pere int ?

SAÏK

Eun neiz aered, eun neiz sarpanter ! Hennez, pell-pell zo, da vare n'ez oa nemet eur paotrik pemp pe c'huac'h vloaz, a lounkaz, enn eur c'hoari, eun dournad mad a viou aer. Pa vez lekeat viou enn eul leac'h tomm, c'houi oar vad, diglora a reont. Laouik pell zo, a zo eiz pe nao zarpant bihan beo buezek enn e gof.

GUILCHER

Penaoz e oar Laouik ez int beo ?

SAÏK

Penaoz ? Ema ar re ze noz deiz o flemma, oc'h heskina e vouzellou. Hag oc'hpenn, dek vloaz bennag zo, Laouik en deuz dislounket unan anez-o, hag her c'haset d'ar vedisined. Ar reman o deuz kinniget da Laouik, hep marc'hata, c'huac'h kant lur evit kaout digant-han an aotre da zigeri e gorf goude e varo. Rak se Laouik a fell d'ez-han stard mont da Baris, da beur-ober ar marc'had. Ni a vir out-han ; re glanv, kalz re glanv eo da vont kuit.

LAOUÏK

Han, han. Hola, hola !

GUILCHER

Diskouezit ho teod d'in. *Laouik a ziskouez e deod.*
Peger louz e deod ! Melen koar eo. Biskoaz kemend
all ! Ma vije maro avad, e glenved ne vefe ket diez
e zisplega sklear, hag ar pezh a welfed enn e gorf a
vefe talvouduz braz evit an dud wizie. An daou
vedisin o deuz kinniget c'huic'h kant lur. Me a
ginnig mil lur.

SAÏK

Mad, great ar stal, great ar stal.

LAOUÏK, *klemmuz e vouez*

Ne ket evidoun me, sur, paour keaz ma z'oun
oc'h ober va zalarou ; evit va mab benniget eo am
euz c'hoant da gaout eun tammik peadra, d'her
lakaat da zimezi.

GUILCHER

N'hor beuz ket a amzer da goll. Mar d'hoc'h evit
sina eur paper dioc'htu, me a baeo mil lur d'hoc'h
heritourien goude ho maro.

LAOUÏK

Me a zino, aotrou.

GUILCHER, *o skriva war eur paper gwenn,
hag o lavaret pep ger en eur skriva*

Me, Laouik ar miliner, a werz d'an aotrou Guil-
cher, medisin, an aotre da zigeri va c'horf, pa
varvin, evit ma welo sklear ar c'hlenved estlammuz
a zo kouezet warn-oun pell zo. Evit ar gwir ze, an
aotrou Guilcher a ro e c'her da baeo mil lur d'am
heritourien kerkent goude va maro.

LAOUÏK

Mad kenan.

GUILCHER

Likiit hoc'h hano aman. *Laouik a skriv e hano,*

oc'h ober neuz da veza skuiz maro. Mad, peur-
c'hreat eo ar stal breman.

LAOUÏK

Saïk, galv Jakez da zont, ta.

SAÏK

Jakez, Jakez !

XVII DIVIZ

AN HEVELEP RE, JAKEZ

LAOUÏK

Selaou, va mab keaz ; gwerzet em euz, d'an
aotrou Guilcher, va c'horf paour pa vezo maro,
evit ma c'hello studia va c'hlenved dispar. Evit an
dra ze an aotrou Guilcher a baeo mil lur d'am
heritourien, da lavaret eo d'id-de. Hola ! hola ! va
c'hof !

JAKEZ *oc'h ober neuz da wela*

O va zad keaz ! va zad keaz ! n'em euz ket ezomm
a arc'hant.

GUILCHER

Deomp kuit. Hirio, diouc'h ar pardaez, e teuin
da welet penaoz ez ai ar bed gant hor c'hlanvour.
Kenavo. *Guilcher a ia kuit.*

XVIII DIVIZ

LAOUÏK, SAÏK, JAKEZ

LAOUÏK *kounaret neat*

Ac'hanta ! Azen gornek a Zaïk ma z'oud ! labouret
mad e peuz, ia, gant da zorc'hennou a bep seurt !
An traou ne d'eont ket mad enn dro p'eo gwir ne
zigouezo ar mil lur gan-e-omp nemet goude va

maro. Sac'h an diaoul, ne ket goude va maro eo am bezo ezomm da gaout arc'hant.

O c'hourdrouz Saik. Klevet a rez, hein ? Hirio, hirio kent an noz eo am euz ezomm euz an arc'hant se.

SAIK

Hirio ho pezo ive. Lavaret em euz d'e-hoc'h n'oa ket peur-c'hreat an abadenn. Red eo d'e-hoc'h ober neuz da veza maro hag en em astenn aze war ho kwele.

LAOUIK

Ia ta ! Ha mar fell Guilcher d'ez-han digeri va c'horf ? A hend all, ne c'hellin ket me ober neuz da veza maro hep dirolla da c'hoarzin dirak ar medisin. Nan, Saik, nan ; labouret fall ec'h euz, hag e rankan me kaout eun dro all buhana ma c'hellin. Emaoun o vont dioc'htu da di va mignoun Iann ar Skrill, miliner Sant Urvoan. Hennez a zo eur zac'had arc'hant teo enn e di. Presta a raio d'in eun nebeud anezho.

Saik, o c'hoarzin a bouez e benn

Ha, ha ha ha ! her c'hredi a rit ? Iann ar Skrill ne bresto d'e-hoc'h nemet liardou da gemeret el loar. Hennez zo piz-kagn ; hennez zo eur c'hoz krign-askourn ma choum e arc'hant da louedi. Ha, ha, ha ! Hennez a laz c'hoenn ha laou da werza o c'hrec'hin. N'ho pezo ket zoken eun diner toull digant-han.

LAOUIK

Ro peoc'h ! glabouser. Ar Skrill a zo va gwella mignoun. Arc'hant am bezo digant-han, m'oarvad. Kenavo, e berr. *Ema Laouik o vont kuit.*

JAKEZ

Mont a rit da di Iann gant an truillou ze enn dro d'e-hoc'h, va zad ?

LAOUIK

Sell ta ! panezenn oun-me ! Gwir eo. *Tenna a ra e ballenn-varc'h hag e voned noz.*

SAIK

Mad. It da gaout ho koumper Iann-billenn. Ni a labouro aman kalz gwelloc'h eged-hoc'h.

LAOUIK

Ne gav ket d'in. *Laouik a ia kuit.*

XIX DIVIZ

SAIK, JAKEZ

SAIK

Na jomomp ket da varc'hata, Jakez. Mall braz eo d'eomp dont a benn euz hon taol. N'euz forz piou a zeuio aman, lavar penn da benn evel doun me. Anez e vefemp kollet.

JAKEZ

Aoun am euz, evelato, o sellet warzu ar meaz, ha da genta, setu o tont an aotrou Kraper, urcher. Ne garan ket kalz an urcherien me, ha ne ket mad koueza e skilfou ar seurt tud se. Petra a fell d'ez-han ? Aoun am euz.

SAIK

Aoun rak petra ? Ober a rin ar pez a vo red. Diwal mad, sell piz ouzin atao, ha bez dinec'h. *Kraper a zeu.*

XX DIVIZ

SAIK, JAKEZ, KRAPER

SAIK o wela stank

Heu, heu, heu... *da Jakez.* En em laka da wela te ive, ta !

SAÏK ha JAKEZ o *unan*, o *wela*

Heu, heu !...

KRAPER

Petra eo d'e-hoc'h ho taou gwela evelse, va mignounedigou ?

SAÏK

Heu... va mestr mad Laouik...

JAKEZ

Heu... va zad mad...

SAÏK

Heu ! maro... maro...

JAKEZ

Ia, maro, evit mad...

KRAPER

Petra ta ? Gwenn, ar boulonjer, ha Guilcher, ar medisin o deuz lavaret d'in ez ca Laouik klanv braz, mes ne gave ket d'in e vije marvet ker buhan ze.

SAÏK

Eo, eo. Ar Gwenn en deuz lavaret ive d'e-hoc'h, hep mar ebed, ez oa troet neat spered Laouik ergentaou.

KRAPER

Her lavaret en deuz d'in, gwir eo.

JAKEZ ha SAÏK, a *unan*

Heu ! heu...

SAÏK

E follentez a zo eat war greski mui oc'h mui. Laouik zo eat kuit enn eun taol o redek pell pell diouz-omp hag en deuz faoutet e benn ouz eur wezen vraz. Bremaik, va faour keaz mestr maro a vezo douget aman war eur c'hraz.

KRAPER

Ha perak ta n'emaoud ket te enn e gichen, Jakez ?

JAKEZ *nec'het neat evit respount*

Evit ober... evit ober... evit...

SAÏK

Ni zo deuet aman buhan ha buhan da gempenn ar gwele ma vezo lekeat Laouik da c'hourvez war-n-han.

KRAPER

Mad. Me zo aman a berz an aotrou Guilcher evit teurel evez oc'h Laouik, beo pe varo. Guilcher, c'houi a oar, en deuz prenet ar gwir da ober eur studi gwiziek war gorf maro Laouik, o *tiskouez eur paper*. Setu ar paper sinet gant Laouik. Rak se : Enn hano al lezenn, me Paol, Stephan, Maze, Izidor Krapar, urcher, a vir ouz-oc'h da zebelia Laouik kent na zeuio Guilcher, medisin.

JAKEZ

N'her graimp ket, ken nebeut.

KRAPER

Gwella zo ; me a jomo aman da c'hortoz korf Laouik da zont, ma welin mar d'eo maro evit gwir.

SAÏK, d'an *dud*

Ho ! la la ! diwallomp, taolomp evez. Ma ne c'hellomp ket kas kuit Krapar, eo great gan-eomp.

KRAPER

Ac'hanta ! pe seurt komzou eo m'emaoud o krosmolat aze te ?

SAÏK, *krenv ha rust e vouez*

Emaoun o lavaret d'e-hoc'h mont kuit ac'halen

raktal. Pe seurt gwir ho peuz da jom da c'hortoz aman an hini maro ? Daoust hag eo c'houi e dad, e dad koz, e vreur, e genderv, e baeroun ? Mil diaoul ! Livirit, ta, livirit.

KRAPER

N'oun ket, gwir eo.

SAÏK

Mad ; it er meaz, neuze, ha roit peoc'h da dud keiz a zo rannet o c'haloun gant maro eun den ker fur. A hend all, petra zo skrivet war ar paper ? Diskouezit anezhan d'in ta ? *Kraper a ro.* Lennit, er penn diveza.

KRAPER, o lenn

Evit ar gwir ze, an aotrou Guilcher a ro e c'her da baea mil lur d'am heritourien kerkent goude va maro.

SAÏK *fouge enn-han*

Hein ? Petra an dra ze ? Kerkent goude va maro ! It da gaout an aotrou Guilcher ha na zeuit enn dro, hen ha c'houi, nemet o tigas mil lur gan-e-hoc'h. Anez ne zeuot ket aman. Klevet a rit hu ?

KRAPER *drouk enn-han*

Lez da ober, va mignoun. Ne rin nemet mont ha dont enn dro, Guilcher gan-en. *Kraper a ia kuit.*

XXI DIVIZ

SAÏK, JAKEZ

SAÏK

Kea ta, kea ta, koz tamm urcher grignouz ! Me a gave d'in ne vije ket eat kuit morse. Has-tomp affo Jakez, rak n'em euz ket leinet ha naoun du am euz.

JAKEZ *nec'het*

Diez e vezo d'eomp ober hon taol, am euz aoun.

SAÏK

Ha me n'em euz ket ; me a raio an hini maro. Pa vezo paeet ar mil lur, krog mad enn-o, ha kea buhan d'o rei d'az tad. Me a gavo mad, goude, penn dioc'h lost d'ar gudenn.

JAKEZ

Marteze, mes...

SAÏK

Hast affo ! Ar re ze en em gavo aman enn eur serr-lagad. Hast affo ta ! Laka ar ballen enn dro d'in. *Jakez a laka.* Kea buhanoc'h ta. Mad. Peleac'h ema ar boned noz ? *Jakez a laka ar boned noz war e benn da Zaik.* Saik a c'hourvez er gwele. Laka bleud gwiniz oc'h va divoc'h, ma vezin drouk livet e doare eun den maro. *Jakez a ra,* Saik en em laka da strefia. Diwal ta ! lakaat a rez bleud em fri. Mad. Breman tosta an daol oc'h va gwele, ha laka eur c'houlouenn war elum war-n-hi. *Jakez a ra.*

JAKEZ

Breman, avad, ez an da welet, enn tu all d'an ti, ma ne zeu ket enn dro Kraper ha Guilcher. *Jakez a ia kuit.*

XXII DIVIZ

SAÏK, e unan, er gwele, oc'h en em lakaat enn e goazez

Mervel a ran gant an naoun, kerniel diaoul ! Pebez c'hoant dibri am euz ! Me a zebrfe eur iar lard, eskern hag all, mar gellfenn e c'haout. O *skrabat e benn, e zivreac'h, ha poull e galoun.* Hag oc'hpenn, ar c'hoz tammik gwele ze a zo leun n'ouzoun ket a betra. Eur zac'had c'hoenn n'eo

ken. Me a vo debret a bez, sur, gant an amprevaned daonet se. *Skrabat a ra adarre.* Sklerijen ar c'houlaoenn ze eo, hep mar, a laka anez-o d'am flemma evelse. Ma ve mouget ar goulou, ar re ze a jomfe siouloc'h, marteze. *C'houeza a ra teir pe beder gweach da vouga ar c'houlaoenn, ha ne c'hell ket, o veza re bell. E kemer neuze eun tamm truillenn war e wele hag e voug ar c'houlaoenn o skei gant hi, krenv, gant an druillenn.*

XXIII DIVIZ

SAÏK, JAKEZ

JAKEZ

Diwal, Saïk, chom hep flach tamm. Kraper a welan o tont, du-hont.

SAÏK

Guilcher gant-han ?

JAKEZ

N'eo ket. Kraper a zeu e unan.

SAÏK

Gwel a ze. Mar en deuz an arc'hant gant-han ni zo diboaniet. Evez ! evez ! *Saïk a c'hourvez er gwele ha ne finv tamm.*

XXIV DIVIZ

SAÏK, diflach er gwele, JAKEZ, KRAPER

KRAPER

An aotrou Guilcher ne ket deuet dioc'htu ganen, o veza eat e kear da brena eun eskenn nevez hag eur gountell vraz evit al labour en deuz d'ober aman. Bremaik e teuo, mes gourc'hemennet en

deuz d'in teurel evez mad ken na zeuio, oc'h an hini maro. Evit ma c'hellin hen ober gant gwir vad, setu ar mil lur a berz an aotrou Guilcher. Ro an diskarg d'in. *Jakez a gemer ar mil lur hag a skriv e hano war an tamm paper.*

JAKEZ

Mad. Mont a rann kuit evit eur pennad ; traou am euz da ober.

KRAPER

Gortoz eun nebeud, va mignoun. An hini a daol evez oc'h eun den maro, e tleer d'ez-han e voued, evel just. N'em euz debret an distera hirio. Me zo skuiz maro gant an naoun.

JAKEZ

Ne ket diez rei boued d'e-hoc'h. *Jakez a laka war an daol, eun tamm kik moc'h, eun tamm gwadegen, bara, eur voutaillad win.*

KRAPER

Mil bennoz Doue d'id, va mab. Kenavo, bremaik. *Jakez a ia kuit.*

XXV DIVIZ

SAÏK, diflach er gwele, KRAPER

KRAPER

Mad. Ne ket re abred. Petra ta ? Kik moc'h ! Gwadegen ! brao, brao ! *E laka an daol tostik tost da benn ar gwele, hag e tebr, e zremm war zu an dud.* Nag eo eun dra vad dibri, pa vezer du gant an naoun. *Dibri a ra.* Ne ket falloc'h ober eur pennadik lenn en eur zibri. *Kemeret a ra e c'hazetenn enn e c'hodell.* Gwellomp petra zo a nevez. O lenn. Pegement a dud zo er Chin : Beteg hen e kredet e ioa er Chin pevar c'hant millioun a dud, pe ouspenn. *Saïk euz e wele, a gemer, dre laer, eun tamm*

boued hag a zebr. Feiz ! n'eo ket gwal vrao ar c'helou. Ar gazetennou ze a laka an dud da gousket. Gwelomp pelloc'h. O lenn. Eur reuzeudik deuet da veza milliouner goude beza bet marc'hadour eskern. O c'hoarzin. Ha, ha, ha ! Peger far-suz e tle beza ar gountadenn ma. Saik a zebr adarre euz an traou lakeat war an daol hep beza gwelet gant Kraper. Lennomp : Eun den reuzeudik braz, paour Job, a oa savet gant-han. Dic'henaoui a ra, savet gant-han, c'hoant da veza pinvidik. Dic'henaoui a ra. Petra eo d'in me ta ? Mantruz eo ar c'hoant kousket am euz... skuiz maro oun... ia, ia... skuiz... maro... kousket a ra. Leuskel a ra e c'hazetenn da goueza. Saik a grog er voutaill hag a ev eur banne. Goude beza evet, e fell d'ez-han lakaat ar voutaill war an daol, mez oc'h en ober, e laosk ar voutaill da goueza. Kraper a zihun enn eun taol, spountet neat, hag a zav enn e za. Saik ne finv ket. Petra zo ta ? Petra zo ? Eun trouz spountuz am euz klevet. Daoust hag an hini maro, Santez Anna, eo, en deuz great an trouz se ? O sellet oc'h Saik. Nan ! ken divalo, ken drouk livet eo hag ha diagent. Trouz er meaz. Trouz adarre ! enn tu all breman. N'euz nemet traou heuzuz enn dro d'in. O krial gant aoun. Piou zo aze ? Piou zo aze ?

XXVI DIVIZ

KRAPER, SAÏK, GUILCHER

GUILCHER, *eun eskenn hag eur gountell hir gant-han*

Petra oc'h euz ta, aotrou Kraper ? me eo, deuet da ober ar studi am euz lavaret d'e-hoc'h.

KRAPER

Hen ober a reot ive ; tostait, aotrou Guilcher.

GUILCHER

Mad. O sellet oc'h gwele m'ema Saik diflach atao enn-han. Setu hor paour keaz Laouik hag a oa ker klanv n'euz ket pell. N'eo ket dishenvel braz dioc'h ma oa araok. N'eo nemet eun tamm gwennoc'h. Hen anaout a ran, hep mar ebed. Lekeomp an daol pelloc'hik, aotrou Kraper, ma c'hellin tostaat mad out-han. Dougen a reont pelloc'h an daol hag e tostaat o daou oc'h ar gwele. Mad. Tennomp ar ballenn wele divar-n-han. Guilcher a gemer ar ballenn.

SAÏK, *oc'h en em lakaat buhan enn e goazez*

Hopp ! la la ! Goustadik ! va zud vad ! Goustadik. Petra ? Ne fell ket d'in, me, e ve trouchet poull va c'haloun.

GUILCHER, *spountet ha souezet*

Mil foultr an diaoul gornek ha lostek ! Ne ket Laouik eo a zo aze ta ?

SAÏK

Ne ket Laouik eo, sur, p'eo gwir me eo.

GUILCHER *drouk enn-han*

Te, piou te ?

SAÏK

Saik, e vevel.

GUILCHER

Hag oc'h ober petra edoz er gwele ze, fri marmouz ?

SAÏK

O kousket. Pa vezan dilabour e kouskan.

GUILCHER *drouk enn-han*

Peleac'h ema da vestr ?

SAÏK

N'ouzoun ket an distera.

GUILCHER

Ha va mil lur ?

SAÏK

Ho mil lur ? Pe vil lur ?

GUILCHER *kounnar enn-han, o tiskouez
e c'hountell vraz*

Kre louarnik an ifern, me a drouc'ho da zious-
kouarn d'id, ma ne levere tra.

SAÏK

Ha ia, ia, sonj am euz. *O tiskouez Krapér.*
Goulennit digant an hini koz a zo aze. Hennez eo
hag en deuz roet ho mil lur da Jakez, mab Laouik.
Ha n'eo ket gwir, paotr koz ?

KRAPER

N'oun ket evit her nac'h.

GUILCHER

Mad. N'ho peuz ket taolet evez awalc'h, neuze,
aotrou Krapér. Ha breman, panevedoc'h, piou a
zistaolo d'in va mil lur, piou ?

XXVII DIVIZ

AN HEVELEP RE, LAOUIK, JAKEZ

LAOUIK, *laouen e zremm*

Me, aotrou Guilcher, me ! setu ho mil lur, hag,
ouspenn, kant bennoz Doue d'e-hoc'h. P'edoun o
tont d'ar gear, n'euz nemet eur pennad, an aotrou
Bernez, noter, en deuz va galvet enn e di, ha roet

d'in eun dournad mad a arc'hant. *Laouik a ro e
vil lur da C'huilcher.*

GUILCHER, *o kemeret*

Perak ta, ha penaoz ?

LAOUIK

Va zintin goz benniget, c'hoar va zad koz, a zo
maro. Hounnez he doa he zammik peadra e ti an
aotrou Bernez hag he deuz va lakeat da heritour
war-he-lerc'h.

SAÏK, *atao er gwele, d'an dud*

Pebez taol chans d'al lakipod se ! *Da Laouik.* Ha
me, va mestr, ha n'em euz ket great labour vad
evidoc'h ?

LAOUIK

Te a zo dleet d'id arc'hant evit c'huec'h *miz*
labour. Dal, va mab, hag ugent lur oc'hpenn. *Rei*
a ra. Mes ne ket echu c'hoaz evit mad an traou.
Jakez, setu arc'hant. Kea hep dale da gaout
Bongors, Gwenn ha Kerangal, ha ro da bep hini
anez-o ar pezh zo dleet.

JAKEZ *o kemeret an arc'hant.*

Ia va zad ; mont a ran dioc'htu. *Jakez a ia kuit.*

LAOUIK

Ha diwar-vreman, ar pezh a brenin, her paein
raktal, hep gortoz eun dervez zoken. Pa jom evelse
unan bennag hep paea, ar pae a zeu da veza
diesoc'h a zeiz e deiz, e c'hellit kredi.

GUILCHER

A hend all, eur maread tud zo ha ne zeu ket
d'ez-o liardou eun dintin goz da baea o dle.

LAOUIK

E gwirionez. Hag an hini a zo war-n-han beac'h pounner e zle, hennez a rank klask finesaou, korvigellou, troidellou ha troiou kamm. Ar seurt traou ze a zo noazuz ouz an honestiz.

AR GOEL A ZISKEN

